

Sizhunvezh ar brezhoneg

12>20/03 2016
e Bro An Alre

ti
douar
alrÉ



SADORN 12/03

Barzhonegomp !

Emgav en-dro d'ar varzhoniezh e brezhoneg hag e galleg. Ur meni staliadur lakaet e plas etre stalennoù levrioù ar vediaoueg, ur seurt tuellenn : doc'h un tu ul lennour, doc'h an tu arall ur selaouer !

10e-12e e mediaoueg Brec'h, digor d'an holl evit netra. [Aozet get](#) mediaoueg Brec'h ha Kerlenn Sten Kidna.

Kontomp diskontomp !

Kontadennoù e brezhoneg lâret get Daniel Carré evit ar re vras hag ar re vihan. Troet e vint àr ar prim evit an dud na ouiont ket brezhoneg. **15e-30-16e-30** e hall ar Greizenn Sevenadurel Athéna en Alre, digor d'an holl evit netra. [Aozet get](#) Ti Douar Alre hag ar Greizenn Sevenadurel Athéna.

Brezhoneg dating

Un degouezh d'ar vrezhonegerion ha d'ar re é teskiñ ar yezh d'en em gavout asimpl ha da lâret kaer. Lakaet e vo an dud daou-ha-daou doc'h taol, roet e vo un tem dezhe ha pep 5-10 mn e vo goulennet gete cheñch taol ha mont da gaozeal get un den arall.

18e-19e en davarn «Gare & vous» a-dal d'an ti-gar en Alre, digor d'an holl evit netra. [Aozet get](#) Ti Douar Alre ha Kerlenn Sten Kidna.

Pred ar vrezhonegerion

Kinnig a reomp d'an dud en em gavout asimpl er preti «L'Aubergine» e Santez-Anna Gwened evit debriñ, komz asimpl ha gober bourrapl.

20e-30 dirak ar preti, kontiñ 20 € evit ar pred. Digor d'an holl. [Aozet get](#) Ti Douar Alre ha Kerlenn Sten Kidna.

Lakait hoc'h anv a-raok ar sadorn 5 a viz Meurzh dre gas ur postel da oliertidouaralre@gmail.com pe dre bellgomz d'an 02 97 78 41 40.



SUL 13/03

Overenn e brezhoneg

En Iliz Sant Per ha Sant Paol e Mendon, kaset get an Tad Jean Le Berrigaud.

11e e Lokoal-Mendon. **Aozet get** Ar Vammenn get sikour Bodad an Eskopti evit ar Brezhoneg.

LUN 14/03

Flashmob


Emgav dic'hortoz en-dro d'ar c'han àr marc'had An Alre. Digor d'an holl evit netra.

10e30-11e30 dirak stal La Trinitaire, ru al Laezh. **Aozet get** Ti Douar Alre, Kerlenn Sten Kidna, Ar Vammenn, Kanerion Pleuwigner, skol Diwan an Alre.

Sine-Kleub

Abadenn sinema e brezhoneg e Ti Hanok, sinema An Alre. An taol-mañ e vo skignet ar film *The Runway* savet get Ian Power. Èl kustum e vo roet ar gaoz d'an dud e brezhoneg goude ar film, dezhe da lâret o soñj ha da eskemm e brezhoneg.

20e30, Ti Hanok, An Alre. **Priz** : 6,50 €. **Aozet get** Ti Hanok ha Ti Douar Alre.



MEURZH 15/03

Sinema e brezhoneg

14^{vet} troiad sinema Daoulagad Breizh. Daou film e brezhoneg a vo kinniget d'ar vugale skoliataet en hentennoù divyezhek ha Diwan e Ti Hanok, sinema An Alre : *Ur valeadenn war valaenn* ha *Kan ar mor*. [Aozet get](#) Daoulagad Breizh, Ti Hanok ha Ti Douar Alre.

MERC'HER 16/03

Tañva d'ar brezhoneg

Ur penn-devezh e brezhoneg evit bugale Kreizenn Dudi Pleuwigner ; dañset, kanet ha c'hoariet e vo !

14e30-17 e. [Aozet get](#) Kreizenn Dudi Pleuwigner ha Kerlenn Sten Kidna.

Ur wezh e oa...

Un emgav evit ar vugale etre 3 hag 11 vlez en-dro d'al levrioù e brezhoneg hag ar blijadur da selaou un istor lennet a vouezh uhel.

16e30-17 e er Greizenn Sevenadurel Terraqué e Karnag. Digor d'an holl evit netra. [Aozet get](#) ar Greizenn Sevenadurel Terraqué ha Ti Douar Alre.

Lennadenn divyezhek

Un emgav evit ar vugale etre 5 hag 11 vlez en-dro d'al levrioù e brezhoneg hag ar blijadur da selaou un istor lennet a vouezh uhel.

17e-17e45 e mediaoueg An Alre. Digor d'an holl evit netra. [Aozet get](#) ar Greizenn Sevenadurel Athéna, Ti Douar Alre ha Kerlenn Sten Kidna.





MERC'HER 16/03

Stal labour-dorn

Stal labour-dorn kaset e brezhoneg digor d'ar vugale adal 3 blez.

15e-17e e skol Diwan An Alre. Evit netra (evit gouiet hiroc'h ha lakaat e anv : 02 97 24 23 53). [Aozet get](#) Skol Diwan An Alre.

YAOU 17/03

Sinema e brezhoneg

14^{vet} troiad sinema Daoulagad Breizh. Daou film e brezhoneg a vo kinniget d'ar vugale skoliataet en hentennoù divyezhek ha Diwan er Greizenn Sevenadurel Terraqué e Karnag : *Ur valeadenn war valaenn* ha *Kan ar mor*. [Aozet get](#) Daoulagad Breizh, Kreizenn sevenadurel Terraqué ha Ti Douar Alre.

Dorioù digor

Al laz-kanal Awen a ginnig deoc'h donet da zizoloiñ o strollad kanerion da geñver o fleustradeg.

18e30-20e30, sal Kerlenn Sten Kidna en Alre (6 r. Joseph Rollo). Digor d'an holl evit netra.

GWENER 18/03

Deomp d'ar mirdi !

Un digarez da vont da welet diskouezadeg al livour **Tal Coat** e Mirdi ar C'hohu e Gwened, d'en em soñjal ha da eskemm e brezhoneg àr e labour.

Emgav da **15e** dirak Mirdi ar C'hoc'hu e Gwened. Digor d'an holl evit netra. [Aozet get](#) Kerlenn Sten Kidna ha Ti Douar Alre.

GWENER 18/03

Filaj

Ha bourriñ a rit é kanal pe é selaou sonennoù ? Dait 'ta d'an davarn Le Rendez-vous des chasseurs e Fetan-ar-Bleuñv e Pleñver !
20e30 en davarn Le Rendez-vous des Chasseurs. Digor d'an holl, a-vad. [Aozet get](#) Ar Vammenn, Kerlenn Sten Kidna ha Ti Douar Alre.

SADORN 19/03



Devezh-studi

Devezh-studi en-dro da dem «al livioù». 6 prezegenn kaset e brezhoneg (troet àr ar prim).



9e-17e30, **Ti Kendalc'h**, An Alre. Digor d'an holl, a-vad. [Aozet get](#) Ti Douar Alre ha Kerlenn Sten Kidna.

Stal-labour linograverezh

Un degouezh evit deskiñ teknik al linograverezh en-dro da dem al livioù.



14e-17e30, **sal Ti Douar Alre, Pleuwigner**. Digor d'an holl adal 14 vlez, a-vad (8 plas 'vo etre tout).

Lakait hoc'h anv a-raok an 12/03/2016 : oliertidouaralre@gmail.com, 02 97 78 41 40. [Aozet get](#) l'Art et l'Île ha Ti Douar Alre.

Kwiz

Kentañ-tro ar c'hwiz, ur c'hoari dre skipailh (a 5 pe 6 den) kaset e brezhoneg kinniget e Breizh a-bezh ! Goulennoù 'vo àr bep tachenn : istor, douaroniezh, sevenadur, brezhoneg, sonerezh ha c'hoazh !



18e-19e30, **Ti Kendalc'h**, An Alre. Digor d'an holl evit netra. [Aozet get](#) Deskiñ d'An Oadourien ha Ti Douar Alre.





SADORN 19/03

Dorioù digor Diwan An Alre

A-hed an devezh e vo kinniget d'an dud stalioù-labour, c'hoarioù hag abadennoù a bep seurt.

9e-17e, digor d'an holl evit netra. [Aozet get](#) Skol Diwan An Alre.

Tañva d'ar brezhoneg / apero

Desket e vo d'an dud ar pep retañ evit bout gouest da saludiñ, da c'houlenn un dra bennak da evet pe da zebriñ...

10e-12e30, sal Emeraude, Lokoal-Mendon. Digor d'an holl evit netra.

[Aozet get](#) Bagad Roñsed Mor hag Ar Vammenn. Un abadenn kinniget evit prientiñ gouel ar Redadeg a vo dalc'het e Lokoal-Mendon d'ar 7 a viz Mae 2016.

SUL 20/03

Apero ar vrezhonegerion

Kement ha kloziñ ar Sizhunvezh àr un ton bourrapl, dait da evet un tasad, da ganal ha da zañsal !

An apero-mañ 'zo kinniget deoc'h da geñver an abadenn «Etre 10e ha 12e» en-dro d'an tem : Kredennoù-pobl e-kreiz ar c'hoadoù.

Un abadenn kaset get ar gevredigezh Pluvigner Patrimoines.

11e30-12e30, dirak adti-kêr Bizhui-ar-c'hoad. Digor d'an holl, a-vad. [Aozet get](#) Ti Douar Alre ha Pluvigner Patrimoines.

A-HED AR SIZHUN

Abadennoù tañva d'ar yezh er skolioù

Da razh ar skolioù unyezhek a Vro An Alre eh eus bet kinniget abadennoù tañva d'ar yezh, kement ha roiñ un digarez d'ar vugale da dostaat doc'h ar brezhoneg evit ar wezh kentañ evit ul lodenn vras anezhe. Ur skipailhig animatourion a yay da gas abadennoù tañva d'ar yezh er skolioù o deus er goulennet. **Aozet get** Kerlenn Sten Kidna ha Ti Douar Alre.

Abadennoù dic'hortoz el lec'hioù foran

Da geñver ar sizhunvezh-mañ e vo dalc'het ar c'hentelioù-noz er-maez ag ar c'hlasoù hag emgavioù e lec'hioù dic'hortoz : en tavarnioù, er stalioù ha c'hoazh. Kement ha lakaat ar yezh àr wel ha gober get ar brezhoneg e-barzh un endro divoutin. **Aozet get** Kerlenn Sten Kidna, Ar Vammenn ha Ti Douar Alre.

DA VOUT KAVET EN HO STAL KAZETENNOÙ

3 500 skouerenn ag ur c'harnedig get frazennoù ha gerioù tavoudus da vout implijet en ho stal-kazetennoù 'zo bet tennet da geñver Sizhunvezh ar brezhoneg. Moaien 'vo deoc'h o c'havout e razh ar stalioù-kazetennoù a Vro An Alre. Evit bout ho skouerenn e c'hellit ivez tremen dre vurevioù Ti Douar Alre e Pleuwigner (11 ru an Tanin) pe dre sal Kerlenn Sten Kidna en Alre (6 ru Joseph Rollo).



Ti Douar Alre, 11 ru an Tanin, 56330 PLEUWIGNER.
02 97 78 41 40, degemer@tidouaralre.com
www.tidouaralre.com

